

Bars en iliz ar Relec hervez ar brud commun,
He zo guelet tri mirakl bars en eur meneus zun,
Dacu den mud a zo guelet ho regeo ar parlant,
Hag eun all zo preservet ha bean hanvet droug-saut.

An neb he deus recitet miracou bras Mar,
Zo eur christen katolik hag eur mignon dezh,
Zo gant-lî preservet hag en hag e vried,
He mirakl rad Montroulez em beus dia komzet.

Eur henor e zee deo choni tud pividik ha paour,
G'honi particuliaramant deus a baroz Plounéour,
Da gavet en ho parroz en iliz ken brûdet,
Anavezet er bed holl gant ar galotiket.

Devez pardon Mau-Doue, kaera fis da velet,
Pa ve ar procession ho c'hantron er Relec,
Holl anseignou ha Blounéour, ar Ghonseil hag ar Maer,
Ha drapo an Nation sayet buel en her.

Kals tud dindan an arion, an archerien ra liz,
Passaj d'ar procession da antren en liz,
Ra d'ezec mochate en deus se er Relec,
Aukombret a hep los a an belemet,
Guerchez Santel ar Hellc rouin in dijansou,
Da doud ar belemet deudoman ha hep por,
Ha vel e dro d'ho chilz uno co/ na tuo vioueli,
Ha bevar chorn ar broaz ha benn departement.

(Propriété de l'Auteur.)

JEAN FUSTEC

Saint-Martin, Morlaix



Montroulez e u P. Lanoe

Plounéour-Hénez SN 1-3-025

GUEZ

VAR SUJET

Ar Brezel ha Miraklou itron Varia ar Relek

Var ton : Gralon ha Kaer a ls.

Me ho suppli Spered Santel,
Ha c'honi Patrounez Breiz-Izel,
Da rei sklerijen d'am sparet,
Da goms deus Guerches ar Relec.


Pa oa Judikel var an trôn,
Mab bihan d'ar roue Graion,
He voa bet enho eur gombat,
Hag e oa skuller kals a voad.

Ac'hane ha dapaz pé hanou,
Abalamour d'ar relegou,
Pere a voa enho chomet,
Goude ar vrezel achuet.

Cloter, roue ar Gallaouet,
N'doa eur mab-kaer e Guenec,
He vab Gram oa gantan er ger,
Ho daou he pretantchont ober,

Brezell da Judikel ha de dad,
Vit ho diskar ho daou a blad,
C'heant ho d'oa an dud direzon,
Distruba Gall-kous a Breton.

Gram e n'em laka bars en hent,
Neur venji tad, mam ha kerent,
Hag ha redas evel eul laer,
Da Wenet da gaout he vreur-kaer.



Troupou ho deus savet neuze,
'Vit enebi deus ar Roue,
Hag ar brezell zo komanset,
Tostic d'ar ger deus a Wenet.

Tre Gemene ha Kastellin,
Ho deus great kals deus a revin,
Eno deus distrujet eur vro,
Hag zo abaoe forestou.

Deus va c'hredi c'honi he peuz poan,
Mez e kreiz forest Torian,
He oa eun Iliz ar gaëra,
Ar moguerriou ha veler c'hoaz

An drezhe zo bet bizitet,
Gant kals ha historiannet,
Hag e gaver bars er scridjou,
Ha re a lenn an historiou.

Tana, gualla, lac'ha, laerez,
Reont betek Plounaour-Menez,
Rent voa d'he beza arretet,
Neul lech azo Relec hanvet.

Heno voa livret d'he brezel,
Gant tud Cloter ha Judikel,
Vit mirout an dud direzon,
Da zistruja ar vro Breton.

En pad tri dez ha ter nosvez,
Ar brezel bag ar lac'herez,
Ha gontinuas er Relec,
Chuec'h mil den a voa bet lazet.

Tri de ha ter nos he oa bet,
Sant Samson Relec daoulinet,
Ho c'houl nerz ha zicour an nec'h,
Ma vije ar guir d'ar gaou trec'h.

He beden zo bet silaouet,
Ar c'hont Ronober a Wenet,
En deus terminet ar vrezel,
Pa voa treuzet gant Judikel.

Ober rejont o'rezon d'ar Verc'hes assambles,
Rac eul loden anezho voa deus Plounaour-Ménez,
Da reze he voa disket guechal gant ho zud koz,
Pedi ar Verc'hes Vari evit caout he bennos.

Mont rejont d'ar zul goude assambles d'ar Relek,
Pa oa klevet ar miracl ar chloc'h he oa sonnet,
Korf ho rochet, diarc'hen ha dizolo ho fen,
Zeont e procession gant-he peb a sierjen.

Pep hini deus he 'challoud e deveus bet roët,
Bars en offranz d'ar Verc'hes pevar pe bemp kuennec,
Dre ma oa ho fatronnez he rentont dei henor,
Bras eo galloud ar Verc'hes var douar a var vor

Eur zoudard demeus a Franc, bro an Durkianet,
Goude koll he vatimant he voa bet prisonnié,
En esperanz he laza evit éza debret,
Evel ma voa an usaj e touesk ar bayannet.

Eur plac'h demeus ar vro-ze he lavaras dezhau,
Cetu aze va mignon did da goan divezan,
Mes en noz-se p' le brizon he voa he n'em voestlet,
De Batrouñes galloudus Guerc'hez sacr ar Relec.

Eun eal guen he n'em bresant he deusan difunet,
Hag a rentas anezan en Iliz ar Relec,
En ho didan treid ar Verc'hes var be ar verzerien,
He oa rentet an esclao mie ho lez da gompreñ.

Eur c'horset e dro dezhau gant cals a chadennou,
'Vel ma velomp garofet ar chas droug en nor bro,
Ar c'horset hag ar chaden a zo bet konservet,
Beteg ar Revolution en Iliz ar Relec.

Mez an amzer a c'hlac'h ar zistrui an traou-ze,
En esperanz etouffi ar miraklou ha re,
A viskoas var an douar a zo bet trubuleit,
Pere ha glask distruja ar burzudou ve gret.

Guerc'hez Santel ar Relec, zo mad deus peb klenvet,
Mes particulieramant deus an dad bandennet,
Deus pevar c'horn ar brovinez he veler ho tont di,
Tud da zigass offrantsou ha de meuli de zy.

— 6 —

Eur c'hennardic daouzec vloaz c'hoas a Tremel-Plestin.
 Ha goe deus beg eur vezen pa voa ho clask kistin,
 Eul lamm ha dregont troafad ha gleie he laza,
 Goelstet eo bet d'ar Verc'hès, n'en deus santet netra.

Eur c'hennard ha Blouezoch a c'hoezec vlas oajet,
 Eur potr diez da blega hag eur *mauvais sujet*,
 Eun deyèz pa voa digor dor pazennou an tour,
 Pigna ra er garidou, mont var ar c'hontr-fort.

Vit ober d'an holl hestoni pa n'alle ober ken,
 Rei he vato d'eur leon a oa heno e men,
 A reas an tour a Leon dindannan zo torret,
 Hag e kouezont assambles ho daou bars er verret.

He dad, he vam oa presant nt pa ho deus guelet,
 A gommansas da grial Guerc'hès sacr ar Relec,
 Evidomp hon daou breman na trista calonnad,
 N'imp ha vel patantamant e zeo lazel hor mab.

Kement den a voa henna ho deus dañlou sbuilhet,
 Pa ho deus guelet anezhan en he zat er verret,
 Kaera miracl adare gret gant hor mam zantel,
 Ne voa nerzet eun tamic offanset he vuzel.

Er blaves mil eiz kant c'huec'h, er gear a Vontroulez,
 D'ar hemp-var-n-ugent a veurs, dévez gœl ar Verc'hès,
 Tour kaer Iliz ar Vur ha deuas da goeza,
 Tapet he voa dindannan eur c'hennardic seiz vla.

Gant he vam he voa goestlet da Verc'hès ar Relec,
 Dre ma oa ha bars neuze ar Vur démolisset,
 Deus touesk ar vein eo tennet goude an drivet de,
 Hag en iac'h a divac'hagn preservet en bue.

Er bla eun a pevar-ugent var rad ker Montroulez,
 Eur mirakl deus ar c'haëra en deus gret ar Verc'hèz,
 Pem pelerin war-n-ugent deus Gallot distroet,
 Ambarket gant Laou Féec bars en aod Garantez.

Pa gommanz ar vag beaji var ar mor burzodus,
 N'em gavañ glao hag avel hang an amzer spontus,
 Tolet oaint ha distolet var gals deus a gerek,
 N'em voestlet int d'ar Relec nag int bet preservet.

— 3 —

Neuze d'an holl bihan ha bras,
 Ar Werc'hès he apparissas,
 Barz en he c'hoaze er goabren,
 O kaëra miracl christenien !

Teir heur e pad ar vizion,
 Ha kement-man ezo guirion,
 Ken a oa c'huec'h heur deus an nos,
 Neuze ro Mari he bennos.

Eul loden zo he lavaro,
 Kement-se holl zo slabennou,
 Mes ne zalc'her ket scridjou koz,
 Deus a gement all a draou foz.

Daou a dri den a ve tromplet,
 Ha n'eo ket c'hoas eun dra ezet,
 Mez me lavar eo goal diez,
 Trompla dek mil den assamblez.

An arme a zo partiet,
 Vit poursu ho inimiet,
 Hag ho deus tapet Cram ar laëz,
 He Kervorgan ty eur glaouer.

Pa voa he arme kemeret,
 Cram rak tal azo n'em rentet,
 Guelit breman an den ingrat,
 Vont d'an daoulin dirag he dad.

He dad outhan zo coleret,
 De zujedi deus ordrenet,
 Commandc ractal en garoti,
 Ma vo disirujet an den kri.

Enho oa devet an den cruel,
 He vreg paour hag he zaou yugel,
 Pitoyabl oa clevet ar c'hri,
 Pa oa c'huezet an tann e ty.

Interret inn bars en andret,
 Eur menhir var n'he zo laket,
 Hag he veler e Kervorget,
 En histor Breiz eo rapportet.

Ac'hane deujont d'ar Relec,
Da zicour an diud mac'hagnet,
Hag evit dastum ar c'horvou,
Pere a va chomet en ho.

Bea-er Relec oa pitoyabl,
Guelet var an douar ha blad,
An niver bras deus a gorfou,
Enleuvet lod deus ho memprou.

Ar re varo zo dastumet,
N'eur mameus bez eoiant laket,
Ervez seridou ar gristenez,
He maint dindan treid ar Verc'hes.

Ar Relec vije sclerijennet,
Tud ar c'hartier alle guelet.
Goulou deus an hent ho tisken,
Bemuoz var bez ar verzerien.

Goude miraklou admirabil,
He oa kasset kleiou d'ar Pab,
Hag en deus daou den deputet.
Da zont d'ar Relec da welet.

Sant Bernard voa unan anhe,
Ha sant Beneat eguile,
Tud a feiz a devotion,
Akompagnet gant sant Samson.

Me am beus c'hoant da recita,
Miraklou deus ar re gaëra,
Pere a zo gret er Relec,
Abaoue an diveza kanvet.

Neuze chomjont e Relec ho zri,
Evit fondi eul leandi,
Pa voa Judikel ho sevel,
Eun Iliz kaer d'hor man Zantel.

GUERZ

VAR SUJET

MIRAKLOU AN ITRON VARIA AR RELEK

Var don : *Kantik Breurez ar Feiz.*

E kichen kroas ar zalud, bilajen Kernelec,
Ar c'hlieier zo bët kleetet ho sön bars er Relec,
Pa veljont eur pelerin ha voa dy ho tonet,
Natif deus a Gommana, privet deus ar c'herzel.

Chane vale d'ar Relec hag en carget a joa,
E vraneliou he zouge he unan var he skoa,
Kant skoet ha ro en offranz da verc'hes ar Relec,
Dre m'an devoa digant hi recevet ar c'herzel.

Rei he ra c'hoas ar Verc'hes assistanc'ha zicour,
Deun toer ha Blegat-Moysant koezet divar an tour,
Var an Iliz he koezas ha ruliet er veret,
N'em woestlet eo d'ar Relec hag eo bet preservet.

D'anter-eost da voel Mari, da zevez he fardon,
En n'em lakan diarc'hén bars er procesion,
Eur c'houiaouen koar-melen en he zouarn douget,
Hag en offranz d'ar verc'hes he ro pemzec' kuenek.

Ervoanic ar C'hériv deus ha Tremel-Plestin,
Voa ho lambruski an Iliz, ar labour e voa fin,
Pa voa ho frezat ar chafot a voa gret gant koat coz
A lammas var eur planken a voa tapet e foiz.

Guelit breman kristenien e bars e trista stad,
He chomas e pad teir heur divar houez he zillad,
Tud a zo e n'em gavet hag eo bet diskennet,
Hag en offranz er Relec en deus roet daou skoet.